

Lommik Kérébel, Kure Plouvien war hent da Gartaj
Konversion Fatima d'ar Feiz Kristen

Pell euz e barrez hag e vro goz Arvor
Lommik Kerebel a zo eat war ar mor.

"Kenavo Bourg Plouvian, Kenavo Breiz-Izel,
Guerc'hez Trezien, diouallit ho pugel".

Al lestr a dreuze ar mor Kreiz douarek.
Penn Lomm oa tenval evel eun deiz koabrek.
Neuz nemet dour dirazhan, war lerc'h, a zeo, a gleiz;
Dindan, ann islounk heb mar a c'hed e breiz.

Perak, o Lommik, kwitât solier ar zaout ?
Soun war da gillou, eno te oa eur maout:
Ma na peuz uzet bragou war skinver ar skolaj
Morse n'az pije klevet komz a Gartaj.

Oh! nan, gant Lommik ne za ket brao ar stal;
E zremm drouk-livet, ar c'houezenn ouz e dal
Ar paourkez a zo stouet, e benn a zioc'h ar speur
Oc'h eugi mantruz, ma zeo eun d'ruet veur !

Lomm en doa drebet anduill euz ar beure,
Eur gwiskad tilzik a oa et war c'horre,
Eur werenad gwin bourdel, eur banne jigoden
Oh! netra nemed da leunia eur wesken.

O nag a besked! birvi reont war ar mor.
Setu Meurlarje gant viled ar glebor
"Rei an tomm eus e c'hinou da vaga'r peskik paour
(Ene ar c'hranked), na pebez kalon aour!"

Lomm gez en dije dislounket Maout ar Go
Epad ma youc'he : "Delenda Carthago!
Va reor evit Eneaz ka kaoc'h evit Didon
Ne vo ken paket Lommik war ar mor don!"

Mez setu du-hont an douar adarre
Raktal, o burzud! Lommik a zo pare
Evel eun alar Brabant, gant e staon al lestr bras
A zigos eun ant a-dreuz ar c'hoummou glas.

"O Douar zantel, salud, bro Afrika!
Bro goz Augustin hag e vamm Monika
Warnoud gwad ar kristenien en deuz redet gwechall
Ni zigan did-te salud Breiz ha Broz-C'hall".

Mez aman ivez Satan zo war evez
Evit touella en deuz kant stumm nevez
Merc'hed ar vro zo brudet evit ho gened kaer
Diwall, o Lommik da galon ouz al laër!

En aber Tunis dal ma'z o douaret
Merc'hed an Islam a glev o lavaret
"O burzud d'am daoulagad! O na koanta Rouni !"
Ha ne baouezent dirazhan d'estlammi!

Eur plac'hik yaouank , daoulagad du dezhi
A lavar dezhan:"Deut-hu ganen d'am zi.
Sidi, va zad zo kaïd, ha d'ho tigemeret
Kredit Fatima, a vezo enoret!"

E zal oa ken glan, hag e dremm oa ken koant
Ma n'hellaz Lommik monet eneb he c'hoant.
"Trugarez d'eo'h Fatima, ha trugarez d'ho tad
Ya me a yelo ganeoc'h a galon vat".

E ti Mohammed e oe gret stad ous Lomm
Tost d'ar plac'h yaouank e galon a ye tomm
Mez ar zonzj eu e zever en diwallas bepred
Ha brao e trec'has ardou an drouk spered.

El mad Fatima a lakas en e benn
Gounid ar botrez d'ar c'hredennou kristen
Dezhi e koms ous Jesus hag e groaz benniget
Hag ous ar Werc'hez, Mari e Vamm garet.

Brao e tisplegaz pardon ar pec'hejou
Ar Spered Santel o chom er c'halonnou
Eun Doue karantezuz a ro d'he grouadur
Dre ar zakramant e gorf sakr da vezur.

Siouaz! ar mare a deu da gimiada
Ann dour a rede war jodou Fatima
"Me zalc'ho sonj (emezhi) ous ho komsou santel
Pedit evidon, Sidi Lomm Kerebel".

Tri miz da c'houde, e Lourd, euné Arabez
A oa daoulinet e c'harz treid ar Werc'hez
Eur plac'h yaouank a c'hened, daoulagad du dezhi
He doa kemeret an hano a Vari.

Hirio Fatima, da Jesus gounezet
He deuz kemeret sae al leanezed
E Frans, e kouent Lizieux, pell ous safar ar bed,
Bennoz da Lommik, ez eo eürus meurbed.

Da zeiz he gwestlou Lommik a brezego
En o mouchouer an dud holl a grogo
Evit sec'ha an daerou a redo war bep jod
Rag meur a galon en deiz-se a vo blod.

Meulomp, mignoned, meulomp holl a unan
Menosiou Doue, Tad Mab ha Spered Glan
A laka da dalvezoud zoken hon troïou kamm
Mez kalon Lommik en deuz bet tomm ... eun tamm!

Hollgwirion miret evit peb bro.

Paroles de M.B.C.

Musique de M.G.G.

P.C.C. sur le manuscrit original: T.G.

(Les couplets 3, 5, 6 et 7 ont été
biffés sur l'original par l'auteur
lui-même. On les a reproduits ici.)